

1.

Fiez

Fresk e oa an amzer. Edo kromm ruz an heol o sevel goustadik. Morgousket e oa ar plac'h yaouank, met der-c'hel a rae sonn war bourzh ar vag. Gant saflik an dour e oa luskellet, tra ma vrasigelle ar vag war gwagennigoù ar mor roufennet. Estreget tarzh an deiz, ne c'hoarveze netra ispisial dre an hir a lagad gwer dalc'het ganti. Dihuniñ a rae tamm-ha-tamm gant flouradennoù yen an avel ha stardañ a rae he roched ouzh he bruched evit mirout an tommder ouzh he c'halon.

Pikouz a oa en he daoulagad kistin c'hoazh, hag he blev rodellek a oa skoulmet dindan he zog tric'hornek. N'he doa bet tamm amzer ebet d'en em fichañ dre ma oa bet bountet diouzh hec'h hamag evit he zro evezhiañ.

Dañjer ebet, emezi dezhi hec'h-unan, ar reier a zo pell c'hoazh.

Sioul e oa ar vuhez war ar vag, ha ne glevet nemet roc'hadennoù tud kousket c'hwek. He c'henseurted a oa skuizh-marv, rak tri devezh diouzh renk e oant bet o lidañ o zagadenn ziwezhañ hag a oa bet frouezhus-kenañ.

Kali a zaoulinas da naetaat adarre roudoù an emgann. E foñs dour teñval ar sailh edo ar broust. Nerzh a lakaas

daoust ma oa bet damlonket ar gwad gant ar c'hoad, ha start e oa diverkañ ar strewadennoù. Ar C'habiten Rozdir a felle dezhañ annezin ur vag propik. Fuloriñ a rae pa veze graet fall o labour gant e lañfreidi.

Fuloriñ a rae ivez pa raent mat, ha seul taol ma felle dezhañ, hep gwir abeg an aliesañ. Huchadennoù e vouezh tenor a glevet o strakal evel arnev. Darn vrasañ an ekipaj 'oa gwelloc'h gantañ en em gavout e-kreiz ar mor da vare ur gorventenn, briataet gant pavier divent ur stivellegenn ramzel eget kejañ gant luc'hed e zaoulagad pa oa un dra bennak a-dreuz gantañ. Setu perak e strive hor plac'h yaouank da lemel ar saotradennoù.

Kaer he doa ober monedoneoù gant he broust, Kali a wele atav ar poullou ruz-flamm war al leur.

Klogorennoù a zeue war wel war groc'hen he daouarn ha stignet e oa he c'higennoù dre forzh chom daoubleget.

Huanadin a reas ha chom a-sav ur pennadig. Torchañ a reas he zal gлеб, peget outañ he blev difoupet, liv ruz a oa savet d'he divjod. Ne oa ket aet war-raok un disterañ. Saotret e oa ar c'hoad ha dibosupl e oa e gempenn : ha nac'h a rae ar vag sunañ an torfedoù ?

Graet he doa he seizh gwellañ evit chom hep kemer perzh er prantad sach-blev mantrus. Chomet e oa kuzhet en ur c'hornig hag arvestet he doa betek penn, met ne oa ket plac'h an toullgofañ, an distripaouin nag an dibennañ. Forzh penaos, ne oa ket barrekoc'h war implij ar sabrenn eget na oa gant he c'hontellig amann.

— Trawalc'h a labour a zo ganin dija, a glemmas Kali war-zu ar sailh mut. Dav eo din purañ ha dresañ ar *Pourchaser* en he fezh, ha pa ne vezan ket o stankañ an toulloù gant tammoù koad e tiskoulman kerdin kanab !

Ha dre ma chome ar sailh direspont, e kendalc’has ganti en ur chuchumuchiñ :

— Ar gwashañ evidon, koulskoude, a zo ober war-dro ar C’habiten Rozdir. Krenañ a ran kerkent ha pa rankan prientiñ e zijuniñ, gwiskañ anezhañ ha troc’hañ e vourroù a-dost. Sklaset on gantañ, gant e frond c’hwerv koulz hag e vousec’hoarzh kriz-debrer. Chom a ran pell diouzh e skeud, par ma c’hellan.

Krak-vorlaerez e oa Kali e gwirionez. Ne oa ket ur mailh war varregezhioù ordin he c’henseurted. Kement morlaer a dle bezañ gouest da laerezh koulz ha da sturiañ e vag ; sed aze reolennoù kentañ ar vicher. He c’herent, morlaeron o-daou, a oa bet dipitet o welout penaos e kase he lestr er skoulmoù bezhin, hag alies en em c’houlenne Kali dezhi hec’h-unan hag un digarez ouzhpenn e oa evit bezañ bet dilezet ? Hec’h ampartiz a c’helled divinout o sellet pizh ouzh stumm he bizied. Kromm e oant gant ar gwallzarvoudoù, ha pa glaske kempenn ar frailhoù e plante an tachoù en he c’hig.

Galv ar gouelini o nijal a-us d’he fenn a gasas anezhi en-dro er bed a-vremañ. Eñvoriñ a oa ur skoilh d’he micher mous ha n’he doa ket c’hoant desachañ evezh ar re all pa chome da hunvreal.

Sevel a reas en-dro war he divesker ken moan ha bizhier da welet an disoc’h. Efedus e oa bet en he labour, hag ar peurrest az afe gant ar glaveier. Evit poent, an heol a bare warni, fougëüs, o klask lakaat anezhi da deuziñ, ha lintrañ a rae gant ar c’hwez.

Tousmac’h kunujennus al laboused a gendalc’he tra ma tostae ar re galonekañ da c’houlenn o lod. Kali a sellas a bep tu, ha pa voe sur ne oa den o spiañ anezhi – estreget he mignon – e kemeras ar pennoù-sardin flaerius lakaet

a-gostez ganti a-ratozh-kaer. Nijal a rejont tro-dro d'ar wern uhel, ha pa stlapas ar plac'h yaouank he zammoù pesked drailhet e krogjont gant un dañs-nij.

E-kreiz ar c'houmoulad pluñv en em gave Marmouz. Anvet e oa e-giz-se abalamour ma ouie ar mod da grat aes, prim ha soubl. Lammat a rae hep diaezamant, ha ruilhal diouzh ar wern evit diskenn. Abalamour da se e oa bet lakaet da evezhiañ e krec'h.

— Hopala Marmouz ! Ha petra 'welez ac'hane ? a huchas Kali, he daouarn a bep tu d'he beg da gas son he mouezh davetañ.

— Reier an Dizesper a zo nepell ! emezañ gant disfiz.

Gronnet e oa an enezenn-mañ gant reier lemm, hag un toullad bigi morlaeron a oa aet d'ar strad abalamour dezho.

— Sur out ?

Diouzh e respont e vefe dav dihuniñ an ekipaj en e bezh, ha foeltrañ teil-tomm ar C'habiten.

— Reier an Dizesper, sur ha n'eo ket marteze ! a gadarnaas-eñ. Ha Kali da lammikat buan da vrallañ ar c'hloc'h.

A-raok pell e vefe dav d'an holl reiñ an dorn evit tremen e-biou da gement roc'h.

Rozdir ne c'houzañvfe kleizhenn ebet war c'horre e *Bourchaser*. Hejañ a reas ar gordenn da c'hervel ar vorlaeron all. Kerkent e tifoupjont, met ne oa ket plaen ar mor. An darn vrasañ a gammigelle dre m'o doa tañvaet fustadoù gwin e strad ar vag trec'het ha kavet anezho lipous betek an dakenn ziwezhañ. Ar c'hloc'h a dinte da hejañ anezho holl, ambrouget gant kriadennoù ar gouelini.

Ar safar a zihunas ar C'habiten. E fulor a gleved diouzh an doare m'en doa da skarzhañ kement skoilh war e hent

a daolioù-treid. Difennet groñs e oa direnkañ anezhañ a-raok kreisteiz ha ne verne ket an abeg. Ur reolenn veur hag a oa da vezañ doujet pizh.

Dor e gabinenn a strakas.

Daoulinet e oa an holl pa lakaas e dreid war ar pont.

Distummet e oa e dresoù, koeñvet e veg gant ar c'hoant tufañ e zispriz.

An dañjer o tostaat a voe disoñjet gant pep hini en arbenn ma oa nec'het ar C'habiten Rozdir. E zaoulagad a oa div linenn voan war e zremm hir.

Kali, munudig en e gichen, na grede ket parañ he selloù warnañ.

— Kozh morgaoul brein, ret eo deoc'h kaout un digarez a-feson evit bezañ direnket ac'hanon.

— Skilfoù an Dizesper a zo dirazomp, Kabiten.

Ha Rozdir da gerzhout war-zu an tilher a-raok tra ma kile kement morlaer d'e lezel da dremen. Chom a reas a-sav da sellet pizh ar pelloù, ha grozmolat. Den ebet na gredas fiñval.

— N'eus ket da dortal, pennoù goullo. Kit war-eeun ha troit a-raok Roc'h ar C'hleze. Goude-se, ledit an aod betek gwelout ar c'hae, gant ma n'eo ket graet hoc'h empennoù diwar fank. Ha bremañ m'ho peus dihunet ac'hanon evit disterachoù ez an da leinañ.

Hag eñ da dreñ kein ha da steuziañ o strakal an nor damdorret. An eil kabiten a reas sin da Gali : poent bras e oa prientiñ pladenn ar mestr. Tellin, brennig kriz, paste-zerezhioù hag ul lonkadig hini kreñv da gas pep tra d'an traoñ. Ar vag bet taget nevez zo a oa hini niz ar Priñs, ha lipouzerezhioù e-leizh a oa bet kavet en he bourzh.

Ar vorlaeron a stagas en-dro gant o labour ha kregiñ 'barzh d'an daoulamm. Lod o stigmañ ar ouel, lod all o

huchal urzhioù kontrol. Tod ar Spilhenn a voe fiziet ar stur ennañ.

Pintet uhel c'hoazh, Marmouz a gemenne cheñchamantoù an trowardroioù, e vlev fich-difich gant red an avel. Kali a skarzhas dourenn he sailh er mor, ha war-c'horre e teuas kerkent angelloù rinkined. Edont o c'hortoz ur profig a-berzh ar C'habiten dre ma oant kustum da zegemer aberzhoù bagadoù prizonidi.

Mouezh raouliet he mamm-gozh a dregernas a-dreñv dezhi, tostik d'he skouarn.

— Hej 'ta stranerez ha kerzh da servij e zijuniñ da Rozdir a-raok ma planto e gontell ennout evel en un dorzh vara.

Darlammat a reas gant hec'h evezhiadenn ha diflipañ a reas he sailh diouzh he daouarn.

Den all ebet na c'helle gwelet tasmant he mamm-gozh na klevet anezhi. Boas e oa Kali da zaremprediñ ganti, met ne ouie ket c'hoazh ma oa ganti evit gwir pe ma oa ur frailh en he fenn.

Adora Torrdent a oa amsklaer he c'horf ha gellet a rae Kali gwelet a-dreuz dezhi e-giz pa vefe bet kizellet he zrolinenn el latar. He blev a oa hir ha rodellek, heñvel ouzh he re. Ouzh he stummoù ront e pege he chupenn skañv. Skedus e oa ar boutonoù bras hag ijinañ a raed anezho en aour evel boukl he gouriz. Diouzh he lavreg pletet e tifoupe he gar goad. Ur vazh ordinal ne oa ket, nann, met un oberenn arzel bet borniet meur a hini ganti.

Tro-dro da Gali e rede ar vorlaeron all a-feur ma tregerne deskrivadurioù Marmouz war an endro. Edont o paouez tremen e-biou d'ur roc'h e stumm ur beg-sabrenn, morvrini seder pintet warni.

Kali a sankas mat he zog re vras e-kreiz he fenn ha

diskenn a reas d'an daoulamm e kof ar *Pourchaser*. Berniet e oa ar pourvezioù en ul lochig sko d'ar gegin, hag en o mesk e tibabas Kali ar frouezh bravañ.

Meskajoù iskis a blije d'ar mestr, asiedadoù gant keuz kozh, saosison, rezin hag uioù gouelini. Soubañ a reas ar mell pladad er mel hag en e chopinad e c'houllonderas an dourenn alaouret he doa roet kement a levenez d'an ekipaj d'an neizheur. Kali ne oa ket stummet gant seurt evaj hag e teve he bouzelloù gantañ kerkent. Evit ar re all, koulskoude, e oa un dourenn sakr. Sklouf, ar c'heginer, a daolas ur sell war ar bladenn voued ha gant e soroc'h boas e asantas lezel anezhi da vont.

He zog a riklas war he fri pa grapas en-dro gant an diri, hag hi da stekiñ ouzh ar bazenn.

Badadao.

Kouezhañ a reas en a-dreñv.

Strinkañ a reas ar boued.

Pa erruas Marmouz da reiñ an dorn e kavas e vignonez azezet war al leur, dipitet ha gleb-teil.

O paouez echuiñ e brantad evezhiañ e oa.

— Ar C'habiten a zo savet an naon ennañ ha n'eo ket evit anduriñ kement a zale, a lâras-eñ en ur gemer un asiedenn all, evit sikour ganti da lakaat pep tra en-dro war ar bladenn. Ambroug a reas Kali etrezek dor ar gabinenn, met herzel a reas anezhi a-raok stekiñ ouzh an nor.

— Krenañ a rez evel ur gozhiadez. Gellet a ran mont tre ma fell dit.

— Mat eo din ma c'hellan chom hep tostaat outañ, a chuchumuchuas-hi, gouzout a rez pegen aonik e vezan a-wechoù.

— Aonik hepken ? Ur c'hrank a lakafe ac'hanout da leñvañ.

Marmouez a stouas en a-raok da zerc'hel war-bouez e zaouarn.

C'hoari a rae ar furlukin bepred p'en deveze tro.

— Souezhañ a raio ar C'habiten. Lak' an dijuniñ war ma seulioù-troad, mar plij.

Ha Kali d'ober diouzh e c'hoant, da zigeriñ an nor dezhañ, ha da achap d'ober war-dro reuz he zamm tru-builh.

O tañva restachoù ar boued e oa ar razhed. Lezel a reas anezho da lipat al leur ha dastum al listri troet da vil-tamm pa dregernas rebechoù ar c'heginer.

— Porselen roueel, gant livaj aour ha lapi-lazuli ! a glemmas Sklouf o sellet a-dost ouzh unan eus an tammoù.

Kali a zantas he muzell draoñ gant ar vezh.

— Ma c'houlenn ar C'habiten tra pe dra ouzhin e lârin eo dre da fazi, plac'hig.

Homañ a chomas diseblant dirak e evezhiadenn peogwir e oa troet hec'h aked war-zu ul loenig o tortigellat dirak he daoulagad. Ur viskoulenn pik-pik a oa o tirollañ a-hed ar guchennig vlev a-dreuz he dremm. Hej-dihej e oa al loenig.

— Salud dit dimezell gaer ha degemer mat dit amañ, war vag ar gwashañ Morlaer a gaver hiriv an deiz. Met gortoz 'ta. Da bikoù ruz ha glas... N'out ket eus ar re zrouk, hañ ?

Sklouf a gilas diouzhtu da gratat war e fornigell.

— Forzh ma buhez !

Ur gridienn yen a savas diouzh seulioù Kali hag a dreuzas he c'horf o skornañ hec'h izili betek he zog. Diouzh ar pikoù ruz ha glas a oa ledet war gein al loen e strinke takennoù binimus hag a oa kreñv a-walc'h da lazhañ ur valumenn.

Un daerenn a zerede diouzh tal Kali pa astennas he brec'h goustadik-tre ha leuskel al loen war an daol dirazi. Pikoù lemm an amprevan a steuzias en-dro dindan e groc'hen ha dianaliñ a reas Kali, frealzet, o soñjal edo o paouez tremen e-biou d'he zremenvan. Stouiñ he fenn a reas da sellet outañ gwelloc'h.

— Ma ouifen penaos out deuet amañ e c'hellfen gwareziñ ar *Pourchaser*.

CHPWFOUITL !

Ar viskoulenn a voe flastret gant botez Sklouf. C'hoarzhin glas a reas-eñ.

— Aloubet o deus ma c'hegin. Sell !

Goullonderiñ a reas ar banerad fiez. Ha war al leur e-mesk ar frouezh e weled ur meuriad o fiñval drant. Eno he doa hi kavet peadra da fardañ an dijuniñ...

Soñjal a reas kerkent er C'habiten, an anken o vougañ he c'horzailhenn. Arvarus e oa lakaat e vuzelloù er pladad.

— Kabiten ! Kabiten ! a huchas-hi a-bouez-penn warzu ar gabinenn.

A-druilh-drast he doa kaset he skasoù etrezek ar morlaer met ne oa ket bet prim a-walc'h.

Re ziwezhat e oa, c'hwezh ar gwad hag ar marv a oa o rodal er saloñs.

Kabiten Rozdir a oa ouzh taol.

Bev atav.

Ha koulskoude, ur viskoulenn a dreuze e asied, disoursi.

Bountet en doa e bred pell dioutañ, ha sec'hañ a rae e gontell en ur lezel roudoù ruz-flamm war e serviedenn skoulmet mat en-dro d'e c'hoûg. E abrant a savas war-zu Kali, seder daoust d'ar c'helan e-kichen e chaosonioù.

— Ar fi... ar fiez.. a zo kontammet, a zistripas-hi en desped d'he berr-anal.

— Ya, merzet em eus se.

Deuet e oa d'en em zigareziñ, met ne rannas grik abalamour d'ar spont.

Treid bihan, diarc'hen ha skarillet a oa ledet war al leur. Marmouez a oa gourvezet, e zaoulagad divuhez digor-frank. Toullgofet e oa bet ha soubañ a rae en e wad.

Al livioù en em veskas tro-dro dezhi, ha koll a reas he c'hempouez.

— Kerzh da gerc'hat ar sailh 'ta. Ar gwad a ro c'hoant dislonkañ din.

Un hej a reas d'he fenn krec'h-traoñ tra ma pellae evel ur preizh war-nes bezañ dantet.

Moustrañ a rae war he daeroù. Habask e oa he zresoù met frailhet e oa he en-diabarzh. Gant ar glac'har koulz hag an aon. Dav e oa dezhi achap. Dav e oa dezhi tec'hout mod pe vod a-raok bezañ lazhet d'he zro. An amparfaled a veze paet gant ar gwashañ moneiz. Kriz ha kalet e oa ar c'hastizoù e-bourzh ar *Pourchaser*. Hag ouzhpenn e oa kouezhet ar sailh er mor.